

AN ABALARDIG

Kanet gant Itron Citarel, deus Ar C'hastell-Nevez

Gwechall pa oan bihanig er gêr e ti ma zad
Me oa kaset d'ar skolaj evit bez' desket mat

Me oa kaset da Bariz da zeskiñ ar galleg
Ne ouien netra ma Doue nemet ar brezhoneg

Ouien netra ma Doue 'met lâret ma fater
Pa oan me plac'hig vihan e ti ma zad er ger

Hogen bremañ desket on ha desket mat a-grenn
Me oar galleg ha latin, me oar skrivañ ha lenn

Lenn al levrioù aviel, skrivañ mat ha pre'eg
Konsakriñ ar bara, ar gwin, kerkoulz ha pep beleg

Ha miret ouzh ar beleg da lâret e oferenn
Ha miret outañ siwazh da reiñ ar vadiziant

Me oar kement zo er bed-mañ, kement zo da ouiet
Kement zo bet gwechall, kement zo da zonet

Me oar ur son hag a lak an neñvoù da frailhañ
Ar mor bras da zridal hag an douar da greañ

[da dridal]

Kentañ louzoù em oa graet gant ma dousig kloareg
Oa gant lagad kleiz ur vran ha kalon un touseg

Ha gant ar raden glas, don ar puñs kant gourhed
Ha gwrioù an aour yeotenn war ar prad dastumet

Dastumet diskabell kaer, da c'houlou-deiz a-grenn
Nemet va hiviz ganin, hag ouzhpenn dierc'hen

Kentañ taolen ma louzoù da c'hout hag hennezh oa mat
Oa kreiz ur parkad segal ya d'an aotrou Labad

[an abad]

Deus triwec'h begodad segal ma noa hadet Labad
N'oa ket da zespunañ nemet div guchennad

Me m'eus un arc'hig arc'hant, d'ar gêr e ti ma zad
An hini e tigorfe en nefe kalonad

Ennañ teir aer-wiber o c'horiñ ur serpent
Pehini zevfe ar bed-mañ, perpetuelamant

Ma teu ar serpent da vat, neuze vo gwall nec'hamant
Seizh lev war-dro dezhañ, ma zerruilho an tan

N'eo ket gant kig klujiri, na kig kefeleged
Met gant gwad un inosant ez eo ganin maget

Ar c'hentañ em oa lazhet e oa barzh ar vered
O vonet d'ar vadiziant ar beleg gwenn gwisket

Dre yeas d'ar c'hroaz-hent, me daolas ma botoù
Ha yeas d'e surveilhañ didrouz war ma loeroù

Ma chomin war an douar, c'hoazh ur bloavezh pa zaou
Me a lakaio ar bed-mañ da dreiñ war e genou

Evezh mat 'ta Louezig, evezh mat d'hoc'h ene
Mar eo ar bed-mañ deoc'h da Zoue eo egile

Le petit Abélard

Autrefois quand j'étais petite, chez moi, dans la maison de mon père
On m'envoya au collège pour être bien instruite

Je fus envoyée à Paris apprendre le français
Je ne savais, mon Dieu, rien que le breton

Je ne savais, mon Dieu, que dire ma prière
Quand j'étais chez mon père, petite, à la maison

Mais maintenant je suis instruite, complètement instruite
Je connais le français et le latin, je sais écrire et lire

Lire les Évangiles, bien écrire et discourir
Consacrer le pain, le vin, aussi bien que n'importe quel prêtre

Et empêcher le prêtre de dire sa messe
Et l'empêcher aussi, hélas, de donner le baptême

Je connais tout ce qu'il y a en ce monde, tout ce qu'il faut savoir
Tout ce qui a existé autrefois, tout ce qui arrivera

Je sais une chanson qui fait fendre les cieux
Tressaillir l'océan et trembler la terre

La première préparation que j'ai confectionnée avec mon doux clerc
L'a été avec l'œil gauche d'un corbeau et le cœur d'un crapaud

Et avec de la fougère verte, dans le puits, à cent brasses de profondeur
Et avec la racine de l'herbe d'or ramassée dans la prairie

Ramassée tête nue, juste au lever du soleil
Seulement vêtue de ma chemise et aussi nu-pieds

La première fois que j'ai lancé ma préparation pour savoir si elle était bonne
Ce fut au milieu d'un champ de seigle appartenant à Monsieur l'Abbé

Des dix-huit mesures de seigle qu'avait semées l'Abbé
Il n'y a eu à récolter que deux poignées

J'ai chez moi un coffret en argent, dans la maison de mon père
Celui qui l'ouvrirait s'en trouverait mal

Dedans s'y trouvent trois vipères couvant un œuf de serpent
Lequel brûlerait ce monde, perpétuellement

Si le serpent vient à vivre, alors se produiront de grands désastres
Jusqu'à sept lieues à la ronde se répandra le feu

Ce n'est pas avec de la chair de perdrix, ni avec celle de bécasses
Mais avec le sang d'un innocent, que je le nourris

Le premier que je tuai se trouvait dans le cimetière
Venant recevoir le baptême du prêtre vêtu de blanc

Alors que j'allais au carrefour, j'enlevai mes chaussures
Et allai le surveiller, sans bruit, sur mes bas

Si je reste sur terre encore un an ou deux
Je ferai se retourner ce monde

Prenez bien garde, jeune Louise, prenez garde à votre âme
Si ce monde est à vous, l'autre appartient à Dieu